


Penaos ec'h aloub ar goukoug neizhioù ar re all



Skeudennoù : Le Monde des Oiseaux, emb. Hachette

- 1- Dozvet en deus ar boc'hruzic tri vi en e neizh.
- 2- Bet eo ar goukoug o skeiñ unan eus vioù ar boc'hruzic kuit eus an neizh, ha dozviñ unan dezhi en e lec'h. Chom a ra tri vi en neizh, ne welo ket ar boc'hruzic an diforc'h ha goret e vo vi ar goukoug gantañ. Hag aet eo ar goukoug da zozviñ vioù all e neizhioù all c'hoazh.
- 3- Diflukañ a ra ar plog koukoug abretoc'h eget poñsined ar boc'hruzic.
- 4- Skarzhañ a ra e-unan vioù ar boc'hruzic eus o neizh.
- 5- Ne chom nemetañ en neizh, ha maget gant ar boc'hruzic c'hoazh.
- 6- Deuet eo bras ar plog koukoug ha derc'hel a ra ar boc'hruzic d'e vagañ.